



Photo : Véronique Le Goff

# CHRONIQUE 1

À écouter sur  
[www.tidouaralre.com](http://www.tidouaralre.com)

## ME O SUPLI MERC'HED

Me ho supli, merc'hed yaouank da zimeziñ :  
Sellit pell en ho 'raok, diwallit a fall chañchiñ.

'Sellit ket doc'h ar re vrav na doc'h ar bitaoed.  
Mar ho peet un den mat, eürus mat a veet.

Kar 'm eus-me bet unan 'deus ket james sentet  
Kar 'm eus-me bet unan 'deus ket james sentet

Na james selaouet da aviz vat erbet.  
Me 'm eus bugale vrav.

Doue en deus int roet din ;  
Ne lak ket kalz a boen da sikour o magiñ.

Ar c'hozhigañ anezhe a lâras din un deiz :  
- Larit-chwi din-me ma mamm 'men emañ ma zad-me.

- Ho tad-c'hwi, ma c'hrouadur, a zo 'barzh un davarn ;  
Er fall gompagnurezh e tispign e argant.

Tuchant e tay d'ar gêr 'vo sur 'walc'h evet dezhañ ;  
Ne ouiin petra gober evit plijiñ dezhañ.

Tuchant e tay d'ar gêr 'devo un tammig droug-penn ;  
Pa rin laezh dezhañ d'e goan e faoto dezhañ soubenn.

Sellit enta merc'hed na peseurt pinijenn na peseurt amzer hir ;  
Na peseurt amzer hir bout maouez d'ur riboter.

Fine Kergosien Lapaul 07/1990 coll. et transcription Nolùen Le Buhé.